

# Ar Breton bihan

## I

— Hola ! Krennard yaouank, te 'zo meurbed faro !  
Lavar d'in'ta penôs ez eo hapvet da vro ?

## II

— Ma Bro doug eun hano skeltr evel trouz an dir  
Ha, koulskoude, melus 'vel nan neus ket eur gir,  
Koz evel ar Gelted, met bepred neve-flamm,  
Ha ganin-me desket ewar barlenn ma mamm,

## III

— Lavar d'in'ta, mabig, an hano dudius  
Hag ez out, hep nep mar, gantau meurbed lore'hus ?

## IV

— Klevet ho peus, sur mat, komz dimins an Arvor,  
Bean d'ezi bugel eo ma brasan enor ;  
Arvorig koantan nez a gempenhas Doue  
Vit an evned bihan ha 'vit ar yugale,

## V

— Me blij d'in kuriuzi, met na rez ket a van ;  
Perak' ta tougez c'hoaz eur bragou ken ledan ?

## VI

— Klevet ho peus ive, marvad, lâret penôz.  
Ar vretoned a zo dalc'hus d'o gizioù koz ;  
Gret eun dro en hon Breiz, ha c'houi welo n'eo ket  
Gwiskamant hon tadou gant an holl dilezet.

## VII

— Ewar vord an henchou, perak ken alies  
E kaver chapellou ha kroazioù minerez ?

## VIII

— En Breiz, Bro an tourioù gwinted beteg an nenv,  
Ar fe gristen, ô trou, 'zo birvidik ho krenv ;  
Hag hon martoloded, 'rok mont da dornan dour,  
Hep mez, gant ar werc'hez, 'deu da c'houlen zikour.

## X

— Ha na gavez ket hir an amzer awechou,  
En eur lec'h ken didrous, ken pell diouz ar c'hêrioù ?

## X

— Petra 'ta 'zo kaeroc'h eget hon bleunioù lin,  
Glizennek ha skedus pa bar an heol vintin ?  
Hag hon lan alaouret, hon brug ru, an edo ?  
Petore kan a dalv mouez an evnedigo ?

## XI

— Bugel te 'zo furoc'h eget kalz a dud vras....  
Dalc'h da garet da vro evelse....Ken arc'hoaz ?